

LEVRIOU AR VUGALE

G. TH. ROTMAN
PRINSEZIG AN DOUR

112 Skeudenn
Dre ar post : 20 real

B. POTTER
PER AR C'HONIKL

15 Skeudenn
Dre ar post : 4 real


HANS ANDERSEN
**PLAC'HIG VIHAN
AR MOR**

6 Skeudenn gant Lolk
Dre ar post: 14 real

E GWERZ E TI "GWALARN"

**GWALARN B. P. 75, BREST
(C. C. 96-38 ROAZON)**

PRIZ : 6 REAL



18
891
683
01
600

10908

55 D

LEVRAQUEG GWALARN


LEVR AL LOENED

GANT

MARC HARID GOURLAOUEN

Em. Skeudennaouet
SKEUDENNAOUET GANT

JAKEZ RIOU



KENTA MOULADUR

MOULEREZ 4, STRAED AR C'HASTELL

BREST 1929

892
683
01
Gov



AN TIGR

Hemañ eo ar c'hresa eus an holl anevaled.

Heñvel a walc'h eo ouz hor c'haz, brasoc'h eo
avat. Krogou ha skilfou spontus en deus.

E sae velen-oranjez a zo brizellet a roudennou du.

Pignat a ra er gwez. Chom a ra kuzet e-pad an
deiz !

E-unan peurliesañ e yev an tigr, e koadou bras
geuniek, ma en em guz damdost d'ar stêrioù ha
d'an andoniou evit skrapa al loened a zeu eno da
eva.

Alies e tag an den, hep ezomm, hag hep abeg.

Kavet eo an tigred en Azia ar c'hreisteiz, en ene-ile
zennou Java ha Sumatra.

Hemolehet int evit o c'hroc'hen ma reer ganto
pallennou kaer, gwall-briziet.



AL LEON

En abeg d'e nerz burzudus ha d'e neuz lorc'hek,
al leon a zo lezanvet « roue an anevaled ».

Ar galloudeka eus al loened debrerien-kig ez eo.

Muzulia a ra etre daou ha tri metrad hed; eur
voue hir-ha teo a c'holo e c'houzoug hag e benn,
dent ha krabanou kreñv-eston en deus.

N'en deus aon rak aneval ebet. Ken nerzus ez eo,
ma c'hell gant eun taol pao terri mell-kein eun
ejen hag e zougen etre e javedou, ker gwevn
ker skañv ma c'hell ober lammou a bevar
metrad, hogen, n'eo ket evit pignat er gwez. E yud
heñvel ouz trouz ar gurun er pellder a lak an holl
anevaled da skrija.

Al leon a vev peurliesha e lec'hioù meneziek ha
koadek-stank ar broioù tomm. Kuzet e pad an deiz,
e teu d'an noz er maez eus e doull. Chom a ra tostik
d'an andoniou ha d'ar steroù evit spia ha skrapa
al loened a zeu eno da derri o sec'hed : antiloped,
ejened, hag all.

Marnaoniet e rank beza a-barz taga an den.

Al leonez-hi, n'he deus ket a voue, ha bihanoc'h
eo eget al leon.

Gwechall e oa kalz muioc'h a leoned. Bremañ e
vezont kavet en Afrika hag er rannvroioù tomm a
Azia.



AL LOUPARD

Ouz an tigr eo heñvel al loupard ; eveltañ en deus eur sae velen marellet du.

Gwidreus ez eo evel al louarn.

E-pad an noz e kante en-dro d'ar c'heriadennou evit paka gedon, preiza ar porziou-yer, taga bep seurt loened ma en em vev diouto.

Pignat a ra er gwez.

Pa vez marnaoniet e tag an den, ar vugale dreist-holl.

Al louparded a vev er broiou tomm: Bro-Indez, kreizenn Afrika.

An doare gwella d'o faka eo astenn d'ezo gripe-dou.



AN OLIFANT

Hemañ eo ar brasa, an teva hag ar pounnera eus
an anevaled pevarzroadek.

Pemp metrad uhelder en deus.

E benn a zo mentek, gant daoulagad bihan bliou,
gant diouskouarn ledan ha pladet, gant eur fri hir
divuzul pe drompilh. An drompilh-se a zo d'ezañ
eur benveg da c'houeza, da eva, da gemer e voued
evit e gas d'e c'henou; drezañ, ivez e c'hell dibrada
e enebour hag e stlepel a-bell.

D'en em zifenn en deus daou bez dant bras iskis,
gouest da boueza kant lur pep unan.

E grôc'hen a zo kalet ha peuznoaz.

Speredek dreist, froudennus ha buanek eo an
olifanted.

Re Azia a zo bet donvaet.

Bez' e c'hellont dougen sammou war o c'hein,
charreat traou pounner.

Diwar c'heotegou ha gwrizioù e vevont.

E doun ar c'hoadou bras stank ha gleborek ar
broioù tomm e vevont, a vagadoù bras.

Olifanted Afrika a zo gouesoc'h ha brasoc'h eget
re Azia.

Hemolc'het int evit olifant o dent.



AR FRIKORNEG

Ar frikorneg a zo, goude an olifant, ar brasa-
aneval o veva war an douar.

War dro pevar metrad hed ha daou vetrad uhel-
der a vuzuilh; c'houec'h mil lur bennak a bouez.

Eul loen disneuz ez eo, galloudek ha kriz-spontus.

War beg e fri en deus eur mell korn hir, a zo
d'ezan eun arm euzik hag eur benveg dispar da
duria an douar.

Ken teo, ker kalet ha ker garo eo e groc'hen ma
n'eo ket eur vilienn-bloum evit e dreuzi.

Gwrizioù, bep seurt geotegou a zebr.

Dismantrou bras a ra d'ar c'hounidigez-douar.

Beva a ra ar frikorneged er c'hoadou tomm, gle-
borek, ha geunieket a Azia hag Afrika. Re Azia o
deus eur c'horn, re Afrika o deus daou.

Hemolc'het int evit o c'herniel, o c'hroc'hen, o
c'hig hag o behin.



AN DOURVARC'H

Unan eus ar brasa anevaled eo an dourvarc'h.

Neuziet pounner ha gwall zivalo ez eo.

Muzulia a ra pevar metrad hed; eiz mil lur ben-
nak a bouez.

Eur penn euzus en deus, paouiou berr, kroc'hen
teo ha noaz.

En dour e chom ar pep brasa eus an amzer.

Diwar blantennou o kreski el lec'hioù geuniek eo
en em vev.

Kavet eo an dourvarc'hed war riblou ar stêrioù
bras e kalon Afrika.

Rouesoc'h-rouez e teuont da veza.

Hemole'het int evit olifant o den, kaeroc'h,
gwennoc'h, kaletoc'h eget hini an olifanted. De-
bret e vez o c'hig daoust d'e vlaz re greñv.

Eul ler start a ro o c'hroc'hen.



AR JIRAFENN

Ar jirafenn a zo heverk dre he ment uhel hag he gouzoug diblegus hir espar : gouest eo da dizout deliou ar gwez betek c'houec'h metrad uhelder.

Eur penn bihan he deus, warnañ daou gornik blevennek. He faoiou a-raok a zo uheloc'h eget he re a-dreñv. he sae velen damwenn a zo brizellet du.

Kerzout a ra gant herrder bras.

Aes eo da zoñvaat.

Ar jirafed a zebr geot ha deliou.

En Afrika e vevont a vagadou bras.



AR BLEIZBROC'H

Evel ma lavar e ano, heñvel a-walc'h eo ar bleizbroc'h ouz ar bleiz hag ouz ar broc'h.

E baeioù a-dreñv a zo kalz izeloc'h eget e re a-raok, e voue a zo garo ha teo, e groc'hen louet pe c'hell, marellet a zu. Eur c'houezenn flarius a sav diwarnañ.

Aonik ez eo. E-pad an deiz e chom kuzet e kevioù doun hogen, d'an noz e teu da gantreal en-dro d'an tiegezioù evit klask kig brein ha korfou maro, ma en em vev diuto.

Dibaot a wech e tag an den.

En Afrika dreist-holl e kaver ar bleizbroc'hed.



AR C'HAÑVAL

Ar c'hañval a zo an aneval an talvoudeka evit ar gouelec'hioù, da lavarout eo, evit ar c'hompezennoù traezek ha meñek divent, da viken gourlosket gant an heol hep gwez, na geot, na dour, a gaver en Azia hag en Afrika, ha ret o zreuze evit mont eus eur vro d'eben.


Bras, treut disneuz eo ar c'hañval, war e gein daou vos behin, e gorf goloet a c'hloan garo.

E zilontegz a zo brudet : gouest eo da chom e-pad pevar pe bemp devez hep debri nag eva.

Plantennou dreinek, fao, heiz, meñ-fiez-real eo e vagadurez.

En Azia ar c'hreiz, dreist holl e vev ar c'hañval.

Eus o laez e reer keuz pe amann, eus o c'hroc'hen arc'henadoù (botou), eus o reun danvez d'ober teltou; debret e vez o c'hig. Ouspenn, graet e vez ganto da labourat ar parkeier ha da zougen sammou.



AN DREMEDAL

An dremedal a zo eur c'hañval d'ezañ eur bos
hepken.

E groc'hen a zo peuznoaz.

E herrder a zo brudet.

Kreñv, kalet eston eo ouz ar sec'hed, ouz an naon
hag ouz an tomm.

Da jao-brezel e servij e gouelec'hiou Sahara en
Afrika.



AN ARZ GELL

An arz a zo eun aneval furmet pounner, d'ezañ skilfou ha krogou euzik, garou berr ha kigennek.

Goloet eo a vleo hir ha stank.

Eur c'herzed disneuz en deus, o veza ma kantre war blad e dreid.

Mouga a ra e breiz dre deurel outañ e baoiou a-dro vriad.

Daou seurt arzed a zo.

1) An Arz gell, a gaver c'hoaz hizio war venezioù Europa, a zo speredek, eveziek, aonik, aes da zoñvaat.

Debri a ra gwrizioù, frouez, mel, kentoc'h eget kig.



AN ARZ GWENN

2) An Arz gwenn, kalz gwallusoc'h eget an arz
gell, kalz brasoc'h ivez.


Muzulia a ra daou vetrad-hed. Ne vez kavet,
nemet er broiou yen-yen, evel Kanada an hanter-
noz hag ar Groenland.

Speredek ez eo ivez, ha gwidreüs.

An arzed gwenn a vev e kevioù doun ar mene-
zioù skournek.

Diwar besked ha reuniged eo e vevont, hag evit
o c'hask e ouzont neuñ ha pluia er mor.

Taga a reont an den a-wechou.



AR GURLAZ-MEUR


Ar gurlaz-meur a zo unan eus an euzika e-touez an anevaled.

Stummet eo evel gurlaz hor broïou; kalz-kalz brasoc'h eo avat, peogwir en deus etre c'houec'h hag eiz metrad hed.

E benn a zo hir; e javedou kreñv-meurbet a zoug mellou dent lemm, e baoiou a zo armet a skilfou. Eur c'hroc'hen teo kalet, graet a skantennou karnek e warez ouz ar bolidi.

Diaes eo d'ezañ bale war an douar; en dour, avat, e teu mibin dreist ha taer. Gwa an him dievez en em lez da veza paket gant al loen-stlej kriz-se! Kaset e vezo e strad an dourïou ha lonket hep truez.

Ar gurlazed-meur a vev e stêriou bras Afrika hag Amerika.



AN NAER-DIOUGANEREZ

Eul loen-stlej euzik eo an naer-diouganerez
henvel ouz naer hor broiou, nemet tevoc'h ha hi
roc'h.

Dek metrad bennak a c'hell menti.

He liou a zo melen, marellet-du.

N'he deus ket a baoiou. En em stleja a ra war
an douar dre weadennoù he c'horf bras-iskis;
skrimpa a ra er gwez.

N'eo ket kontammus evel an naer-wiber ha dibaot
a wech e tag an den. Hogen kreñv-meurbet ez eo.

Debri a ra an anevaled a bak. O starda hag o
mouga a ra etre he gwalennoù, hag o lonka goude
beza o brevet, kig hag eskern.

An naered-diouganerez a zo kavet en Afrika, en
Indez hag en Okeania. Beva a reont dreist-holl war
lez ar stêrioù.



AR ROUDENNEG

Henvel eo ar roudenneg ouz ar marc'h hag ouz an azen.

E sae velen pe louet a zo roudennet a zu.

Eun aneval aonik eo; d'an distera riskl ez a kuit d'an daoulamm.

Dont a reer a benn d'e zoñvaat koulskoude.

Debri a ra, evel ar marc'h hag an azen, greun, geot, hag all.

En Afrika ar c'hreisteiz eo kavet. Beva a ra a dorkadou (a vagadou) peurliesa.

BREST

Mouleriez straed ar C'hastell, 4

1929

